

KANTIK

EN ENOR


An Den Venerabl DOM MICHEL NOBLETZ

DISKAN :

Andante



Ao trou-Dom-Mi-chel ben ni-get, Mignou-Dou-



-e hon Tad ka-ret; Mi rit d'hor bro-feiz hon tud



-koz, Ma zeimp ga-neoc'h d'ar ba-ra-doz! Mi rit d'hor



-e bro-feiz hon tud-koz; Ma zeimp ga-neoc'h d'ar ba-ra-

25
Ar c'hloc'hik a iel c'hoaz en dro
Hag ar vugale a drido
O teski gant hon den Doue
Penaos kerzet en hent an Ee.

26
D'ar re vras a deu d'he zelaou
E tispleg freaz an taolennou
Hag he laka-doun er spered
Ar gassouni ouz ar pec'hed.

27
Dom Michel en ho kurunen
E vanke c'hoaz eur berlezen;
Goulen a rit beza seizet
Ivit flastra ourgouill ar bed!

28
Pa dosta termen ho puez
Merzer a gorf, a garantez
Gant an Ifern oc'h goall gasset
Mes gant Mari oc'h kennerzet.

29
Goude teir bassion skrijuz
Oc'h ene zav d'an Ee, skeduz,
Divar ar gopaz d'ar Baradoz
Bleac'h inema-ouz hor gortoz.

30
E harz ho relegou santel
Ken enoret e Breiz-Izel
Ra gresko c'hoas ar miraklou
Ma kreskimp deoc'h an enoriou.

31
En deiz kaer-ma an Arvoriz
A galoun vad gant an Iliz
A gan, a bed hag a esper
E savoc'h prest var an aoter.

J.-M. M.

IMPRIMATUR

Quimper, le 1^{er} Septembre 1897.F. CORRIGOU,
Vic. Gén.Ce Cantique est vendu 10 centimes, au profit
de la cause de Dom Michel

1
Dom Michel, enor Plougerne
Hag enor Breiz-Izel ive,
Euz ho kavel betek ho pez
Varnoc'h e par ar Zartelez. } bis

2
Ho tad, ho mam, guir gristenien
Ho magerez e Kerodern
En oc'h ene, bugel euruz,
A zile karantez Jezuz.

3
Da hevar bloaz, eun Itroun gaer
Ho rene betek an aoter;
Ha d'an daoulin er chapelik
E pedac'h evel eun elik.

4
Var ho studi, e peb danjer
Hag en ho kroaziou ker pouner
Biskoas n'he deuz maiket Mari
D'ho tional ha d'ho conforti.

5

Dre ho lignez, ho kueziegez,
Ar pezh zo guell, dre ho furnez
Ho poa da joaz er c'hargou kaer,
Choazet ho peuz krouz hor Zalver.

6

Evit beza oll da Zoue
Ha trehi kren ar vauite,
Petra n'ho peuz ket gouzanvet
En ho kaloun, en ho spered?

7

Tremen 'vit eun diskiantet
Kasset da zivoal al loened,
Setu ho stad, Michel Nobletz
E kreiz an hu, ar gouperez.

8

An tan a skarz an aour melen,
Ar boan a ziskuez neb zo den;
En hent ar grouz, e' hui den santel,
A zesko kelen Breiz-Izel.

9

D'ar bed, d'ar c'hik, e' hui a zo treac'h
E lochennik soul Tréménac'h;
Ho korf a gren, mes oc'h ene
A dr I gant eurusdel an Ee.

10

Beleg dispar, guir abostol
C'hui vale var douar sant Pol;
Chenchet a gren e Plougerne
Dre ho labour ha gras Doue.

11

E Montroulez, e bro Treger,
Gant an Tad Quintin, ho preur ker,
Eb aoun ebet, eb espern den,
C'hui brezeg al lezen gristen.

12

Ho taolennou mysterius
Hag ho sarmoniou ken nerzuz
Er c'heriou koulz hag er meziou
A ra kalz vad d'an eueou.

13

Mes ar galoun zo en ho kreiz
Zo bet ato d'an Arvoriz,
D'an Arvoriz tud rust, kalet,
Yac'h a galoun, eun a spered.

14

Conk, Eussa, Batz ha Molenez,
Sizun, Goaien, Douarnenez
Deoc'h hen deuz roet ar pezh vella
Euz he vuez ha roet gant joa.

15

Na pebez den, martolodet,
E hon abostol benniget
Pa gemer da gador zarmoun
Eur vag' lusket var ar mor doun!

16

Prezeg a ra ar Binijen
Hag eb damant ar bec'heurienn
Evit kastiza ho memprou
A zaoubleg kerdin ho bagou.

17

Hentchet varzu Douarnenez
Gant he vam dener ar Verc'hez,
Michel a ra labour ar Zent
Hed ouспен pemp bloaz varn'agent.

18

Pa zone kloc'hik dom Michel
Ha pa gane eur vers santel
An holl var he lerc'h a rede
En dro dezhan en em yode.

19

Neuze gant dousder hag ijin
Ha dre vertus ar c'bras divin
Gant he c'hoar Mac'harid Nobletz
E kelenne tud ar-barrez.

20

He gomsiou flour 'vel gliz an De
A zaoure mad douar Kerne
Rak e plas gristou ar pech'ed
E sav vertuziou kaer meurbed.

21

Ne glevet a bep tu bemdez
Nemet ar c'hañkoun nevez
Kanet var eun tou dudiuz
D'ar Zent, d'ar Verc'hez, da Jezuz.

22

Karet gant tud Douarnenez
Michel en em blij en ho zouez;
Mes en despet d'he rann galoun
E rank distrei da vro Leon.

23

E porzik Conk, e tal ar mor
An den santel a gav goudor;
En eun ty paour, euk ha distro
E vev humbl betek ar maro.

24

Mar de torret dre ar gosni
Ha brevet he oli izili,
E chomet draut, lem a spered,
Ehan da gelen ne heil ket.